

YF_0005_En eur gerig a vourh Karnod

En eur gerig a vourh Karnod, na peuz tost d'an Eurbrijou
Lec'h ma 'z on bet aliez o tispenn ma roujou

O tarempredi eur plah koant pezh hini garan parfet
Toud an dud a lare din am-boa bet amzer gollet

Mar 'am-eus bet amzer gollet, bet am-eus bet aliez
Mond a ran d'oned eur wech c'hoaz beteg ti ma mestrez

Mond a ran d'oned eur wech c'hoaz na d'he zi d'he saludi
Ha deus ma lavaro din me a yelo d'ar studi

Ha deus ma lavaro din nag he mamm nag he zad
Me a laro keno dezi ya zur a galon vad